

### Magerez an Drezné.

Ma me me mouez a talent speret evid ober  
 Me a skrivfe eur c'himia kent partial dar ger  
 Me zo bed ouec'h miz varnugent he kastel magerez  
 En ti ar c'hont an drezne ag e ti ar c'homtess.

Ag a meus maget dezo diou dimezel iao uank  
 E tonet d'o dilezel me a meus kalz nec'hamant.

Me a meus pourmenet gato dre saliou dre cambjou  
 Bed e zon gato ive en illis ar gatredral  
 vellet an escop nevez kenta ma deuas e kastel  
 da ober e hantre.

Bed e zon ganto ive sellet deus an eureujou  
 sellet doc'h an tan a joa nag an artifiçou  
 Pini zo gred en henor d'an escop a Leon  
 An deveus kalz a virit vertus en peb fesson

Bed e zon gato ive nag e bordic ar mor  
 Sellet o deuz ar verdaïdi e treuzi ar ganol  
 Sellet deus ar verdaïdi o vond da vizina  
 Da kichen chapel kallod eur plaç en devota.

Bed e zon gato ive en alle ar Gernevez  
 Ag er maner k/laodi demeuranç var ar meaz  
 Bed e zon gato ive en alle ar Gernevez  
 e vellet ober revu var ar gardécotez.

Bed e zon gato ive el leuriou ar vererien  
 E sellet tourn an ed

A hane me teuas e kastel ag evid coanvi      *hiverner*  
 Da hedal ar mis maë evid ma kimiadis  
 Dioc'h dimezelet an dresne dioc'h dimezel k/laodi  
 Dioc'h o zad ag o mam a kement zo en ti.

Mond a ran da kimiada dioc'h an dimezelet  
 Goude ze e rin ive dioc'h an domistiket  
 Adieu eta Ambroizik, c'houi eo ar mab enan  
 A doucho an daou fars al leve  
 A jujo ar re al pa savo difficulte.

Adieu ta moucheu Roussel, adieu ta la pierre  
 Adieu ta fantik Cloarec hag ar paot jardiner.  
 Me a ia breman d'ar ger da kaout va bugale  
 Breman eus c'houec'h mis varnugent e lezis a neze.

Brema e zeuz c'houec'h mis varnugent e sortis deuz va zi.  
 Me a moa eur bugel daou vlas a voële dourek din  
 Breman e vezin konsolet, pa em goëlin e nem rentet  
 – Debonjour deoc'h, c'hwi or mam pel e oc'h bed dianket.

Ni a ia breman do reçeo gant peb laouenedigez  
 Prometit deomp or mam non delesfet jamais  
 Me a promet deoc'h va bugaligou no delessin jamez  
 Keit a ma plijo gant Doue va lessel en buhez.

Tavid va bugaligou na zamantit ket din,  
 kar o mam a zo tener ag a deu da vantri  
 Me a vel touriou kastel demeus a zor va zi  
 A zigasso da chonch dime deus va dimezelet.

Deus dimezelet an dresne, deus dimezelet k/laodi  
 Deus o zad a deus o mam a kement zo en ti

*ag eus*  
 Er ger deus a Vontroulez deus a Sant Malani  
 Enon e man o kerent nessa c'houi a ielo aliez di.  
 Neuze ma koëlo enon ma vezan e buhez  
 E pourmen gant an noblanç var ar pave nevez.